

- 87 -

Dastumad Pennwern : dornskrid 90

117. AR POT PINVIDIG

(follenn 82)

Eur re benag a zo espress
oc'h va droug prezek d'am mestrez

o devez lavaret dezi
e kavan mad an odivi.

o devez ket lavaret gaou
hag eva ran chopinadaou.

Mar gevan-me gwin ag a ran
arc'hant a meus a paea a ran.

Mar bezan-me en ostaliri
Me pae a ben dond anezi.

Lavaret he dan eb am c'har
ne meus ked a ed en douar.

Gaou a lavar an eb en lavar
Me meus a gwini a segal.

A gwini du da ober iod
an eb am drouk-prezeg a zo sod

Me a meus var va leur trivarc'h bern ed
a kement all a ronsset,

a kement all a chatal saout
eurüs ar verc'h alfe va haout,

a kement all a chatal korn
eurüs ar verc'h a kroge em dorn

Lavaret e dam gwir amour
ne meus ked a lestr var ar mor

me a meus tri dass alaouret
a te, marmouzik, no goëlez ket

gaou a lavar an eb a lavar
e man va lestr en Portugal

- 88 -

Ag eunal en anter-all-len
a zo karget a lien guen.

Ag eunal en anter-ar-stang
a zo karget a c'hreun arc'hant.

vvvvv

Moris Follezour, 25 févr. 1851

vvvvvvvvvvvv